

Dizano : **An hini goz hag an hini yaouank**

Iskiz-kenañ eo ar ganaouenn-ze.
Modernnaet eo bet an daore-skriva.

An hini goz
Eo ma dous ;
An hini goz
Eo sur !

Ha koulskoude, war a welan,
An hini yaouank ar vravañ.
An hini goz,
etc.

An hini yaouank a zo koant ;
An hini goz he-deus arhant ;
An hini goz,
etc.

Me n'ez an morse d'ar marhad
Na ro din-me gwerz boutaillad ;
An hini goz,
etc.

An hini goz am hundu mad ;
An hini goz a zo d'am grad.
An hini goz,
etc.

Ha koulskoude e-barz e kêr
An hini yaouank a garer :
An hini goz,
etc.

An hini yaouank a zo ker plomm !
An hini goz 'zo 'n tammig kamm.
An hini goz,
etc.

An hini yaouank 'zo lijer ;
An hini goz 'zo pounner ;
An hini goz,
etc.

An hini goz he-deus bleo gwenn ;
An hini yaouank bleo melen.
An hini goz,
etc.

An hini goz liou raden seh ;

An hini yaouank liou an erh ;
An hini goz,
etc.

Liou an erh eo, hag hi ker yen ;
Na ra gozig eur zell ouzen ¹!
An hini goz,
etc.

Ha koulskoude n'ouzon perag
Ma halon 'ra tik-tak, tik-tak.
An hini goz,
etc.

Tik-tak a ra ma halon baour
Pa'z an da skei war doull an nour².
An hini goz,
etc.

Teh alese ! teh kuit ! teh pell !
An hini goz a zo kant gwell !
An hini goz,
etc.

An hini goz a zo kant gwell
Ne ra ket taillou dimezell ;
An hini goz,
etc.

Diaked an dimezelled,
Diaked e tri rann ar bed.
An hini goz,
etc.

Dimezelled ne reont nepred
Nemed goap ouz ar Vretoned.
An hini goz,
etc.

Pa daolan dorn war benn he glin,
An hini goz a hoarz ouzin.
An hini goz,
etc.

An hini goz 'zo Bretonnez,
An hini yaouank 'zo Gallez.
An hini goz,
etc.

¹ ouzen : ouzin.

² an nour : an nor.

Fae eo ganin gand ar Gall brein,
Gand krohenn an diaoul war e gein !
An hini goz,
etc.

Fae eo ganin gand ar Hallez ;
Ganti karnou en he botez !
An hini goz,
etc.

Goude tri deiz e skuiz peb den
Gand glao, avel ha merh estren.
An hini goz,
etc.

Mar komzet a vriedelez
Komzet din ezu eur Vretonez.
An hini goz,
etc.

Ne lakin vann³ pa vo laret
Eo ar Vretonez gwrahellet ;
An hini goz,
etc.

Evitañ da voud gwrahellet,
An aval blaz fall n'en-deus ket.
An hini goz,
etc.

Bezef droug gand neb a garo,
Trohet an ed, dornet e vo.
An hini goz,
etc.

Bezef droug gand neb a garo,
Ma dous ha me ni eureujo ;
An hini goz,
etc.

Ni 'gousko en eur gwele kloz,
War ar pell fresk, bemnoz, bemnoz ;
An hini goz,
etc.

Na pa ve ker koz hag ar bed,
Ganin e vezo gwalennet !

³ lakin vann chom a rin bouzar.

An hini goz,
Eo ma dous,
An hini goz
Eo sur !